

D'ann Otrou Raoult, ha d'holle veleien Plougerneve.

## GWERZ

### ZAVET DI-WAR-BENN MARO ANN OTROU GRAET

War don Baron Jacuioz (Barzaz-Breiz)



Son, ma zélen, son hiryouduz,  
 Son, ma savinn eur werz kanvuz,  
 Eur werz hag a vo klevet pell,  
 Dreist ménéou Kerne-Huel.

Ar potr denved 'vid ar beure  
 A gan abred oar ar mené :  
 Hen zo laouen, me na n'onn ket ;  
 Ma c'halon baour a zo nec'het.

Ma c'halon baour zo glac'haret,  
 Marv eo ziouaz ann Otrou Graët !  
 Ann Otrou Graët, hon mestr, hon zad,  
 A oa d'imp ha d'ann oll ken mad.

Leret d'in-me, c'houi peorien gez,  
 A vev gand poan ha dienez ;  
 Piou a re d'hech labour d'ann han,  
 Ha bara goude pâd ar goan ?

Ha c'houi, tud jentil di-war-dro,  
Pa skoe 'n ho touez ar maro ;  
Leret piou a vize klevet  
O veuli ar re 'poa kollet ?

Piou a vize er misionou  
Hag a re ken kaer zarmoniou ?  
Hag er pardon, enn pep parroz,  
Oc'h ober enor d'hon zent koz ?

Oll a-unan, e lavaret :  
« Hen-nez a oa ann Otrou Graët ;  
» Ann Otrou Graët, eur gwir vreizad,  
» Hen-nez a oa eur belek mad. »

Mar oa den a zoujans Doue,  
Den a skiant a oa ive ;  
Nag a vugel en deuz desket !  
Nag a velek en deuz zavet !

'Touez ménéou Kerne-Huel,  
Hag he hanvet Kein-Breiz-Izel ;  
Rez ann argoat, kreiz lanneier  
Eunn ti kaer ha braz a gaver.

A benn da benn eo bet zavet  
Gand Doue hag ann aotrou Graët ;  
Doue stoke er c'halonou,  
Ann Otrou Graët stoke 'n noriou.

A stoke 'n noriou, 'n eur c'houlen  
Evel ar paour ann aluzen,  
Ann aluzen a c'houlene  
'Vid siminer Plougerneve.

Baleour mad, te a ia pell,  
Dre'r pevar c'horn a Vreiz-Izel,  
Hag enn Léon, hag enn Treger,  
Ha te velaz eunn ti ken kaër ?

Eunn ti a zo digor d'ann oll,  
D'ann neb a gar donet d'ar skol.  
Ti biniget, pa ho kwélan,  
Ma daoulagad 'deu da oelan.

Goelet ive, Kernevadiz,  
Ha tud jentil, ha plouisiz ;  
C'houi, dreist ar re all, beleien,  
Ha c'houi, tadou, mammou kristen.

Oll oc'h euz kollet eur mignon  
Hag ho kare a vir galon ;  
Ni, bugale baour, emzivad,  
Hon euz ziouaz ! kollet hon zad !

— Pa iud ann avel, toul ma dor,  
Me glev o tonet gand ar mor,  
O tonet a bell eur glemvan,  
Traonienou Breiz ouz he diskan.

Pell diouz ar vro gaér a garent,  
Diouz ho zad, ho mamm, ho c'herent,  
E zo ive gwir vugale  
Da Vreiz ha da Blougerneve.

Gwir Vretoned, tud a galon,  
Et da gas pell ar fé virion ;  
Evel-d-omp, 'dal m'ho deuz klevet,  
Goela ha pedi ho deuz gret.

Ho fedennou, koulz hag hon re,  
A zo bet deut mad gand Doue ;  
Hon zad, enn envou kurunet,  
Gand zent hon bro zo azeet.

Enn env, pell diouz ar bed poaniuz,  
Da virviken e ma evruz ;  
He zorn us da Blougerneve,  
O venniga he vugale. —

— Tad ker, kenavo 'ta 'n envou !  
Keit a vevimp, raimp ho kavou !  
Liez ho skeuden venniget  
A dremeno dre hon spered.

Liez ive, war ho pez men,  
Ni iel da laret hon feden ;  
War ho pez ni iel da bedi,  
Ha da laret ho meuleudi.

Ia, ken a zeui pred ar maro,  
Da beb-unan<sub>l</sub> ni lavaro :  
« Ra vo karet, ra vo-meulet,  
» Meulet dre-oll, ann Otrou Graët. »

Pa vez o kousket 'barz ar be,  
Ar re zo bet ho pugale,  
Vo klevet c'hoaz, gand ann avel,  
Ho meuleudi enn Breiz-Izel !

Benniget a vo hoc'h hano,  
Ha karet dre-oll barz er vro,  
Tra vo n'ho zao enn bro Kerne,  
Ménéou du ha bruk war-n-he !

#### UNAN A SKOLERIEN PLOUGERNEVE.